

8.

Holl kemeromp eur gentel  
 E buez ar merzei :  
 M'ar d'eo bet soudard fidel  
 Ha sentuz d'he zever,  
 Gouzout rea da genta  
 Heulia lezen Doue,  
 Ha disprijont ar bed ma  
 'Vit an Èternite.

9.

Brema p'hon deuz resevet  
 Euž Iliz-Veur Sant Per  
 He relegou benniget,  
 N'hon deuz ken da ober  
 Nemed diskwez d'hor Patron  
 Muioch'a garantez,  
 He garet a vir galon  
 Ar rest euz hor buez.

10.

Hirio ni bromet beza  
 Henvel ouz hor patron  
 'Vit mont d'hon heur diveza  
 Demdost da Zant Gorgon.  
 Ama den na c'hell refuz  
 D'ar feiz beza fidel :  
 Kentoc'b eget nac'h Jezuz  
 Ni a garfe mervel !

**Imprimatur :**

Kemper, 28 a viz Even 1923.

A. COGNEAU,  
pic. gén.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

8N2-3-042




TON KELVEN : C'hoai holl a zo kristenien.

**DISKAN :**

Ni ho salud, sant Gorgon  
 Merzer ken burzuduz,  
 Selaouit, ô saint patron,  
 Hor moueziou truezuz,  
 Diouallit mad hor parrez  
 Kreskit enni ar feiz,  
 Da Jezuz ha da Verc'hez  
 Ra vezimp noz ha deiz.

1.

Breman zo c'huezek kant vloaz  
 E kear Nikomedy,  
 Daou vignoun en em gavaz  
 O chom ér memieuz ty :  
 Beza voant daou offiser  
 Gorgon ha Dorothe,  
 Servich an impalaer  
 Reant aketuz hemde.



## 2.

Dreist peb tra 'karont Jezuz  
 An daou vignoun yaouank,  
 Dre ho frezegen nerzuz  
 Ar gristenien zav stank,  
 Beteg zoken er palez  
 Etouez ar bañanet.  
 Hadet eo ar wirionez  
 Ha Jezuz zo meület.

## 3.

Gorgon, 'kreiz an henoriou,  
 A zo tad ar beorien,  
 Evelse he genteliou  
 Ra muioc'h kristenien.  
 Ar re zall, ar re vouzar  
 Kement en deuz klenved,  
 Dre galz miraklou dispar,  
 A zo ganthan pareet.

## 4.

Mez an ifern en egar  
 Hen deuz laket, siouaz,  
 An impalaër e kounnar.  
 Setu an drubuill vraz ;  
 Laza rér dre boaniou kriz  
 Eskibien, beleien ;  
 Distrusjet eo peb iliz,  
 Ha mil ha mil gristen.

## 5.

Neuze an daou offiser  
 Gorgon ha Dorothe,  
 Dirak an Impalaër  
 Teu d'anzao ho Done,  
 Hag ar mestr fall d'ar bourreo  
 Lavar ho skourjeza,  
 Ho rosta, var eur c'hrill beo,  
 Hag erfin ho c'hrrouga.

## 6.

Sant Gorgon zo henoret  
 E daouzek eskopty,  
 E kant ilis eo pedet  
 Merzer Nikomedy.  
 Tud fidel parrez Plovan  
 Deut holl, ha daoulinet,  
 Ha kinnigit ho poan  
 D'ho patron benniget.

## 7.

Ia, dreist oll ni her pedo  
 Evit hor zoudardet,  
 'Vel ma pedomp Sant Guydo  
 Vit hor martolodet.  
 Gant sikour ho fedennou  
 Hor bugale jommo,  
 Kristenien vel ho zadou,  
 Beteg heur ar maro.